

Emañ an archerien o klask piv en deus lakaet tachoù war an hent en noz tremenet. Rak kalz a rodoù a zo bet toullet.

Charlez, un test, a lavar : « Gwelet em boa ur vaouez o tec'het kuit war velo ha mont e-barzh un ti er bourk. »

Emañ an enseller Frifurch o c'houlennata tud an ti-se.

« Perak e vez lakaet an diskred warnon gant an archerien ? » a lavar Klara, perc'hennet an ti.

Magali, merc'h Klara, a zo gourvezet war he gwele. Oberataet eo bet he glin. Disklêriañ a ra : « Kemeret em boa louzoù evit kousket en noz tremenet, ha kousket em boa. »

Yann, gwaz Klara, a lavar : « Ne'z eus netra da rebech din. Didamall on. »

Kavet en deus an enseller Frifurch an hini kiriek d'ar rodoù toullet.



## Respont :

Piv en doa gwelet ur vaouez o tec'het kuit ?

Piv eo Magali ?

Piv a lavar ez eo didamall ?

Piv eo perc'hennet an ti ?

Piv en deus kavet an hini g/kablus ?

**C'hoari an enseller. Ro anv an hini g/kablus ha displeg da respont :**

